



War ton ar Vesventi

pe war ton : Noël, Noël da Nedelek...

---

## PLAC'HED DIWAR AR MEAZ,

Deskit aman, evit ho silvidiguez, penaoz eo mezus ha glac'haruz

Kwitaat ar Vro ! . . . .

---

# MARI - JEANN E PARIZ.

---

I.

Mari-Jeann eüruz ha laouën,  
Enep enkreuz war he dachen,  
A labour stard gant iec'het mad  
War meureuriou he Vam, he Zad. —

II.

Ar Zul (deiziou ar pardouniou)  
Ro levenez, plijaduriou. —  
Houman gant kenitervezed,  
He kerent, ar mignounezed.

III.

'Em kavont goude an offern

VIII.

Ne 'gwell 'kreis an oll strolladou  
Hon deuz mal ober afferiou ,  
Nikun evit rei dourn dezhi,  
Nag evit en em kundui

IX.

Var hent an ti-ze koanteet  
En d'oa sonj beza kemeret.  
Tri miz breman int tremenet  
Ha Mari-Jeann en deuz laosket.

X.

Teir weach he servich kave fall ;

## III.

'Em kavent goude an offern  
Gant dillad brao, gant koefou gwen,  
En o bourmen war dro staliou,  
Da gedal ar brosessionou.

## IV.

Eun dervez paour-kez Mari-Jeann  
Kear Paris en he benn kan ;  
Gant fisians gounit kals arc'hant  
En hent a za, enep skiant !...

## V.

Houman krede oa kals essoc'h  
Kaout gwelloc'h he bara pelloc'h !.  
An tad, ar mam, ar breur bihan  
N'int ket laouën hirio aman,

## VI.

Pa deu ar c'harr kichen an ti  
Da klask Mari-Jeann 'vit Pari.  
« Kenavo-ta, Mari-Jeannik,  
A lavar nec'het ar paotrik !...

## VII.

Houman erruet e Pari  
A teu dillo d'en em nec'hi,  
Pa diskenn euz an hent-ouarn  
Diot he lagat, boudet he skouarn !....

## X.

Teir weach he servich kave fall ;  
Aman ar mestr re he skandal,  
Pa ne gav ket houman staged  
D'al labour oa gourc'hemennet ;

## XI.

Leac'h all an dud zo re grignouz,  
Hag eun all kav houman re louz.  
Pe e leac'h-man pe e leac'h all  
Ar kegin zo striz ha tenval ;

## XII.

Kreis an deis dlët eo kaout goulou ;  
Gant houman epad derveziou  
Ne teu den da ober komziou ;  
Difenned int ar marvaillou,

## XIII.

Nemet evit he skandala  
Pe c'hoas evit gourc'hemenna.  
Gwall ankenius he gambr huell,  
Dindan an toenn ranker sell ;

## XIV.

Aze dleet eo da gousk en noz,  
Al labour echu, neket roz !..  
Er goan neuze kals re ien e  
Hag en han re tomm adarre.

## XV.

O pegen keuz en denz aze  
 Mari-Jeannik en he gwele ;  
 Ha sonj en denz eo het ganet  
 E Breiz kaër ha ken karet !.....

## XVI.

Houman hirio a vefe mez  
 Da distro breman war ar meaz ?  
 Tost, dindan ar toenn-ze memes  
 Lojont all plac'hed assembles ;

## XVII.

Ar merc'hed-man ep relijion  
 Lavaront geriou pep fœçon ;  
 'Vel rei dezhi pljaduriou,  
 Ne ront nemet fall kuzuliou ;

## XVIII.

Hag<sup>h</sup>houman, an diot paour-kez  
 En deus gret anaoudegez  
 Gant an tud-ze euz a Paris,  
 A Lavaront int euz a Breiz,

## XIX.

Houman red war heul ar re-ze  
 D'an abadennou evelse,

## XXIII.

En doare-man, atao direiz,  
 Ar paourentez, an dud difeiz  
 Hon deus kasset abret houman  
 D'an ti savet 'vit ar re klan ;

## XXIV.

Hag aze n'int anavezet  
 Nemet dre eur taolenn merket ;  
 War kenta gwele int douget  
 Hag an hano ne ket klasket.

## XXV.

Er sal vraz neuze tremenont  
 Ar medisinet, ne reont  
 Stad ebed aman anezhi  
 Pa deu houman da echui :

## XXVI.

«Gwele (26) c'huec'h-varn-uguent: Eur maro»  
 Setu zo lavaret en-dro ;  
 Ha Mari-Jeann pa z'eo marvet  
 N'eus bet dezhi beleg ebed,

## XXVII.

Kerent ebed da zigas feiz  
 Araog he maro, spountus deiz !...

Houman red war heul ar re-ze  
D'an abadennou evelse,  
D'an dansou pe leac'h e gavont  
En assembles tud ep gwirion,

XX.

Pere int ken fall ha diroll  
Ha n'euz e Paris henvel skol !...  
Gant an tud-ze, ar fall vagad,  
Mari-Jeann koll an ober mad,

XXI.

Laosk he dillad Breiz a kostez  
Evit dispigna he follentez.  
Kasset er mez euz e peb lec'h  
Houman breman ne ket ep nec'h ;

XXII.

Dleet eo da kaout eur koz-kambr fall  
Ha da bourmen en tu, en all,  
Gant ar plac'hed galvet gisti  
Fors pe amzer a vo dezhi.

EUR GER — Goulennit " MARI-JEANN " gant an Imachou braz ha livet kaer, gwerzet daou gwennek (ha kalz nebeutoc'h c'hoas dre meur a hiqi), e Redon (Breiz), e ti ar mouller, an Aotrou Bouteleup, pe e ti ar Reuer euz an Unvaniez-man, e Paris, 21, Boulevard St-Michel. — Kalz a mad neuze a reot d'an oll diwar ar meaz, d'ho mignoned, d'ho kerent, hag an aotrou Doue, en eur digas deoc'h ar gwir iec'het, a bennigo ho tiegez, ho labouriou.

Kerent ebed da zigas feiz  
Araog he maro, spountus deiz !...  
N'e vez memez anavezet  
Lec'h an toull boutin er vered

XXVIII.

E bet isket he arched treud  
Goloet buhan en he skeud !...  
Setu penaoz, kouls lavaret,  
Ar gwal stad a zo kinniget

XXIX.

D'ar plac'hed redont e Paris  
Evit servicha en ho gis. —  
Choumit-ta en ho tiegez  
Evit kaout ar silvidigez !...

Flour - Bruk

R. de K.

